

# Son ar merc' hed a zoare

*gant kaner brudet ar vro IFIK MOAL*

**I**

Selaouit mad ia va mignonet  
Ar zon nevez a zo d'eoc'h kanet  
Rak gwellit ta ar merc' hedigou  
A ra breman o ia kals ardou.

**II**

Abaoue in'o d'euz droit da voti  
E vez klevet Soazik a Mari  
An eil hag e ben o layaret  
Ni a zo gwesf evel an holl botret.

**III**

Me lavar Soaz a vo depute  
Mari lavar me a vo ive  
Assamblez ni reio lezennou  
Da lakat renk en holl botredou.

**IV**

Ar merc' hed breman o d'euz butun  
Er pakat da ober o zizun  
A neuze pa vez ganto sumet  
E laeron c'hoaz ini o goazet.

**V**

En noz tremenet va ini goz  
A zo bet sayet e kreiz an noz  
Fouliet e d'euz din va godellou  
Koumer va butun a va megoiou.

**VI**

Er c'his nevez c'hoaz zo eruet  
Bragezeier hir gant ar merc' hed  
Setu perak ni paotret iaouank  
A rank oela evit kaout unan.

**VII**

Dizale ni zougo a losten  
Er zeo ver hag er c'hoeflig gwen  
Kredi ran neuze deiz moulargez  
Er vro, er vro a vez o bemdez.

**VIII**

War ar vatiman martolodet  
Er rejiman breman soudardet  
Ar merc' hed a ielo d'ar brezel  
Evit difen ar Frans a Breiz-Izel.

**IX**

'Vit enebi ar boum atomik  
E vo kasset Louise a Marik  
C'hoarzin vo great o velet Soaz  
Pa vo war e ginou er mask a gaz.

**X**

Poen eo din paouezrak ar merc' hed  
Ouzin eb dale a vo fachet  
Potred iaouank araok dimezi  
D'ar merc' hed lavarit eb damanti.

**XI**

Me zimezo ia gant er vaouez  
Hag a le zo ganen va bragez  
Me a g'no a vouez va fen  
Va greg dime ranko kaout el losten.

*PABOR KASTELL.*

# C'HOANT EM EUZ FORTUNIA

*gant kaner brudet ar vro IFIK MOAL*

**I**

Selaouit merc' hef iaouank  
Ecoutez ma chanson  
Dimezi me am euz c'hoant  
Je suis joli garçon.

**II**

Me zo gwesf da labourat  
Je sais bien travailler  
Ia me a zo er potr mad  
Tel que vous me voyez.

**III**

Biken en ostaleri  
Je n'aime pas la boisson  
Cognac, gwin hag eau de vie  
Pour moi, c'est du poison.

**IV**

Fumi ne ran ket ive  
Trop cher est le tabac  
O er vaouez ganen me  
Economie fera.

**V**

Dar zul e kreiz an iliz  
Je fais ma prière  
Mareat a iaouankiz  
Font bien le contraire.

**VI**

Ne vezan mui o tansal  
Je n'aime pas la danse  
Ar zaout me vez o tioual  
Et alors je pense.

**VII**

E Mari va dousik koant  
Ma jolie bretonne  
Ne d'euz aour na arc'hant  
Mais elle est mignonne.

**VIII**

Pa vezin me fortuniet  
Ma femme s'ra heureuse  
Ganti pa zin da gousket  
Si elle est frieuse.

**IX**

Me dommo e zreid dezi  
Pas besoin d' bouillotte  
Le matin café au lit  
Je f'rai la popote.

**X**

Va maouez a vo eurus  
Croyez mad'moiselle  
Me a vo karantezus  
Je n'aimerai qu'elle.

**XI**

Araok echui va janson  
Je dis : jeunes filles  
'Ni a rofe d'in e c'halon  
Seraut bien gentille.

**XII**

Me am euz c'hoant fortunia  
Je prends la première  
Piou lavaro dimme ia  
Devant Monsieur l' Maire.

*PABOR KASTELL.*

**Evit er friko, plijadur a Muzik...**

**... gant JAZZ an daou IFIGK**